



AR RE UNAC'HEO

ré sol la?

Tro- ma- re ar huz- he- ol oe Kle- vet
ré

Trouz neih- our Trouz eur vag er oe
sol la? ré

Kle- vet o to- ned gant an dour Ha
ré sol ré sol

stap ha sonn an drom- pilh hag an Ta- bu- li
la ré sol

nou Ken a zo- ne ar her- reg war
la? ré

lein ar me- ne iou

A R R E U N A N E T

(Les Ligueurs)

- 1 - Tro mare ar huz-heol, oe klevet trouz neizour,
Trouz eur vag a oe klevet o toned gand an dour,
Ha skrap, ha son an drompill hag an taboulinou,
Ken e son ar herreg war lein ar meneziou.
- 2 - Ha moned da weled, ha ne welis netra,
Nemed Marhaid ar gerheiz, pao-kamm, o pesketa:
- Marhaid, Marhaidig, te'nij uhel ha pell:
Petra 'nevez 'zo digoueët, e-barz e Breiz-Izel ?
- 3- - Netra nevez 'zo digoueët e-barz e Breiz-Izel,
Nemed, e tri horn ar vro 'zo strafuill ha brezel,
Savet an oll Vretoned, Plouiziz ha Noblañs,
Ha ne vo fin d'ar brezel ma ne gav an dud chañs.
- 4 - Neb o gwele dastumet da vond da harzou Breiz,
E tachenn Kergrist-Moelou, d'ar yaou-fask, tarz an deiz,
An arkebust war o skoaz, pluenn-ruz war o zok,
Ha kleze ouz o hostez, banniel ar feiz e-rôg.
- 5- Ha pa oant voned kuit, i 'zo set d'an iliz,
Da gimiada diouz Sant Pèr koulz hag an Aotrou Krist.
Hag o tond euz an iliz, 'n em stouont èr vered :
- Asa 'ta, Kerne-Uhel, setu ho soudarded !
- 6 - Setu soudarded ar vro, soudarded unanet,
Evid difenn ar gwir feiz rag an Hugunoded,
Evid difenn Breiz-Izel rag Bro-Zaoz ha Bro-Hall,
Kement a wast or Bro-ni gwas eged an tan-gwall.
- 7 - Hag o tond euz ar vered, e-leiz a houlenne :
- Peleh kavim mezer ruz d'èn em groaza brema ?
Ken a drohas kaloneg, paotr maner Kergourtez :
- Kemerit skwer diganin hag e viot kroazet êz.!
- 8 - Ne oe ket e gomz gantan, e gomz echuet mad,
Toullet gwazienn e vreh, ken e strinkas ar gwad,
Ha war dal e borpant wenn eur groaz ruz a oa greet,
Hag a-barz nemeur amzer, an oll a oa kroazet.

BARZAZ BREIZ

GERIOU DIEZ - neizour : ce soir - an drompill : la trompette -
ar herreg : les rochers - Marhaid : marharid : Margue-
rite - ar gerheiz : le héron - Plouiziz : habitants des
plous - harzou : frontières - kleze : glaive - kimiadi :
dire au revoir - gwasta : dévaster - mezer : drap -
skwer : exemple - gwazienn : artère - kroazet : croisé.